

Da belec'h ez aimp?

(Yann - VI/67-68)

(Neuze e c'houlennas Jezuz ouzh an daouzek : " daoust ha
(fellout a ra deoc'h-c'houi ivez mont kuit ?". Simon Pêr a
(respontas dezhañ : "Aotrou, DA BELEC'H EZ AIMP ? TE AC'H EUS
(KOMZOU AR VUHEZ PEURBADUS!")

An diviz-mañ etre Jezuz hag e ebestel a zeu nepell da c'houde
n'en devoe kresket Jezuz ar bara hag ar pesked, ha roet da zebrin
d'un toullad mat a dud (tost da bemp mil den, a lavar an destenn).
N'eo ket sur, tamm ebet, en dije graet Jezuz Krist kement-se. Ar
burzhud a reas a oa kentoc'h heman: lakaat ar re o doa degaset bou-
ed ganto da lodenniñ anezhañ gant o amezeien, ar pezh a oa moarvat
kalz diaesoc'h d'ober. N'eo ket posubl, a-hend-all, ne vije bet e-
touez kement a dud nemet ur paotr hag en dije bet gantañ peadra da
zebrin. Lakaat an dud-se, o doa bara ha pesked, d'en em zisober eus
o boued, da reiñ d'ar re all, a oa un tamm mat a vurzhud.

Nebeut a dud a gomprens Jezuz d'ar mare-se ha c'hoarvezout a
rae dezhañ a-wechoù komz garv ouzh e ziskibien. Fellout a rae dezhañ
selvel an niver brasañ a dud, rak gouzout a rae ec'h esperne dezho
evel-se kalz a boan. Ar re-se, o doa an eurvad da welout Jezuz Krist
e-un, da selaou outañ o komz, d'e welout pareañ tud klañv, ha na re-
jont ket o mad eus kement-se, a zeufe un deiz bennak evelato da ze-
gemer kelenn hor Salver, hogen goude bezañ gouzanvet kalz. Ablamour
da se e lavaras Jezuz ouzh ar Groaz: "Va Zad, pardonit dezho, rak ne
ouezont ket petra emaint oc'h ober". En ur lavarout ar c'homzoù-se
e wele splann brasañ Hini a zo deut biskoazh war an douar, peseurt
poanioù a rankje koezhañ c'hoazh war an denezh a-bezh, a-raok
ma teufe da zegemer ar "c'homzoù a vuhez peurbadus" lezet dimp gantañ.

Seblantout a ra, hervez respont Pêr da c'houlenn Jezuz, e oa
eñ en doa komprenet ar gwellañ ar Mestr. Klaskomp gwelout petra a
c'helle bezañ ar c'homzoù-se a "vuhez peurbadus" en doa klevet Pêr
digant Jezuz. Jezuz a gomze d'e ebestel diwar-benn an Tad. Int-i
ne c'hellent ket kompren c'hoazh moarvat piv e oa Doue, met bez e
c'hellent kaout un nebeud menozioù diwar E benn dre ar pezh a welent
eus E oberoù hag eus E grouadelezh. Doue, hervez Jezuz Krist, a
labour dalc'hmat. E labour a zo krouin; krouin bedoù nevez ha la-
kaat BUHEZ warno. Kement tra krouet gant Doue a zo peurbadus; en
em dreusfurmiñ a ra an traoù met ne steuziont ket; sujet int da
lezenn an emroadur. Doue a grou bedoù, ha speredoù da lakaat warno
Ar speredoù-se a zo peurbadus. Doue o c'hrou ceun ha dizesk, dezho
da dizhout ar parfeted ha da zont da vezañ eñrus drezo o unan, heñ-
chet hepken gant Doue. Doue a zo mat, met pep hini ac'hanomp a
rank gounid e evurusted. Hon emroadur-ni a zo krog milionoù a
vloavezhioù a zo. An ene, pe spered, a rank gwiskan stummoù danve-
zel e-pad pell amzer evit pignat gant skeul an emroadur. Ar stum-
moù danvezel-se a zo da gentañ ar plant. Skol ar vuhez a grog war
ar bazenn izelañ: bezin, gwinvi, hag all, da echuiñ, araok tremen
e stummoù loened, dre ar re o deus gwrizioù, kef, delioù, bleuñv ha
frouezh. El loened e welomp an ene un tammig dieupoc'h dre ma c'helli
mont eus an eil lec'h d'egile, ar pezh ne ra ket ar plant diouto o-
unan. Evit ar wech kentañ ivez e welomp an "ene" o LABOURAT. Ar
plant ne labouront ket; kemer a roont an dour ha tomder an heol

elec'h m'emañt. Ma ne deu ket a zour betek enno e varvont, da lavarout eo, stumm danvezel ar blantenn a varv, met an "ene" a oa e-barzh a gendalc'h da vevañ. Al loened int-i a rank ober un dra bennak: klask boued, klask goudor, toullañ ribouloù, ober neizhioù, en em zifenn, sevel reoù vihan. Pa zitez an ene ar stummoù plant evit kemer stummoù loen, e krog ivez evel just e derez izelañ ar skeul (buzug d.s.) evit echuin dre ar gouennoù uhelañ, dre ar re ma kaver enno endev karantez ha poell (kizhier, chas, olifanted, marmouzien). P'en deus tennet ar spered eus ar stummoù loen, holl ar pezh a c'helle deskiñ, e vez lakaet da arnodiñ e gammedoù kentañ e korf un den. Amañ ivez e krog dre ar gouennoù izelañ a dud, heñveloc'h ouzh ar marmouzien bras eget ouzh tud evelomp. Empenn an dud-se, evelato, a zo brasoc'h eget re ar marmouzien, hag o izili a zo stummet gwelloc'h; chom a reont en o zav. An naon a lak an dud-se da glask boued; evit lazhañ loened e rankont ober armoù (gros da gentañ, e maen); da herzel ouzh ar riv e rankont ober dilhad gant kroc'hin anevaled, klask goudor er c'hevioù, diwezhatoc'h sevel lochennoù. Deskiñ a reont ober tan. Oc'h ober ul lamm mat en amzer e kavomp an dud-se araokaet awalc'h: kresket eo niver o binvioù, ijinet o deus ar rod, kroget int da hadañ plant, ober a reont gant gerioù evit en em reiñ da gompren, krouiñ a reont tiegezhioù, met pell emomp c'hoazh eus an den a vremañ. Hogen amzer a zo, pep tra d'e dro! Ni a zo boudoù peurbadus HAG AN NATUR NE RA KET A LAMMOU!

An den en em gavet war ar bazenn-se, petra bennak ma teu poell dezhañ bep un tammig, a yev pell amzer evitañ hepken. Emgar eo. Ne oar ket petra eo lodenniñ gant ar re all. Gant ar c'hantvedoù e wellaiowar ar poent-se, dont a ray da soursial muioc'h ouzh ar re a vev gantañ. Met ezhom en devo kalz amzer araok dont da garout tud all estreget ar re a zo kar tost dezhañ. D'ar mare-se n'en deus ket c'hoazh a giriegezh, ne oar ket ober an diforc'h etre ar vad hag an droug. Evitañ, lazhañ e amezeg da zebriñ n'eo ket pec'hed. Met dont a ra ur mare ma'z eo emdroet awalc'h evit gwelout ez eus traoù ha ne zle ket ober; dihuñ a ra e goustians. Klevout a ra mouezh Doue, dispis da gentañ, met krenvoc'h gant an amzer. Adal ma'z eo krog da glevout mouezh Doue e teraou ennañ un emgann: emgann etre an aneval hag an ael, an aneval, a fell dezhañ e sachañ war e giz, hag an ael, a fell dezhañ e vountañ war-raok. Un hir a emgann eo henezh ablamour n'en deus bevet keit all an ene e korfou, dezho a bep seurt ezhommoù danvezel da seveniñ. Jezuz a zo deut davet an dud enkorfet war an douar da zeskiñ dezho penaos en em gemer evit krennañ an hent a zo etre an den aneval hag an ael. Amañ e rankas Jezuz neuze displegañ d'an ebestel piv e oa Eñ. Dont a rae a-berzh Doue hon Tad. En ne oa ket Doue, rak Doue a zo brasoc'h egetañ. E gefridi a oa ober e doare ma ne vije kollet hini ebet eus an eneoù fiziet ennañ gant an Tad, da lavarout eo, kement ene a zo war an douar, rak galloud a oa bet roet dezhañ war an denelezh a-bezh. Eñ, Jezuz, en doa graet evel ma rank an holl ober: pignat gant skeul an emroadur, nemet Eñ en doa kroget gant e bir-c'hirinaj milionoù ha milionoù a vloavezhioù en hor raok. Lavarout a rae d'e ebestel e teufent ivez da ober ar pezh a rae Eñ. Jezuz, ha muioc'h c'hoazh. Pa grouas Doue an douar e fizias e Jezuz rene-rezh ar blanedenn. Kiriek eo, eta, dirak Doue, eus emroadur an Douar. Jezuz d'e dro en deus un niver bras a seled - speredoù glendindanañ, o seveniñ e urzhioù noz-deiz. Jezuz a gar an denelezh a-bezh ha fellout a ra dezhañ ez en em garfe an holl dud kenetrezo. Hemañ eo e urzh kentañ d'e ebestel. Da ziskouez e garantez ouzh an dud eo deut e-un davedomp, kemeret gantañ ur c'horf evel hon hini, d'hon heñchañ gwelloc'h. Araok dezhañ dont e-un e kasas misionerien all d'an dud. Moizez a oa unan anezho. Kenderc'hel a ray da gas.

Kas a ray ivez ar Frealzer (1), an hini a zegaso soñj d'an dud eus ar pezh a lavaras Jezuz, ha traoù all ouzhpenn ha na c'helle ket an ebestel kompren c'hoazh. Jezuz a gomzas moarvat ivez d'e ziskibien eus ar bedoù all annezet, ken planedennoù evel an douar, danvezel, ken lec'hioù all en ec'honder, a-wechoù tost dimp, met diwelus da zaoulagadoù ar c'horf: "e ti va Zad ez eus kalz lec'hioù da vevañ". Displegan a reas dezho sur awalc'h ivez arouez ar baradoz douarel ma komser anezhañ er Skriturioù. Ar baradoz-se a oa ur blanedenn a oa en em gavet en ur mare eus hec'h emdroadur ma voe ret dezhi, evit gallout kenderc'hel gantañ, en em zisober eus darn eus he foblañs ha ne felle ket dezho gwellaat. Jezuz a zegemeras ar speredoù-se en ul lec'h bennak en ec'honder hag a gomzas dezho d'o c'hennerzhañ, rak al lec'h m'edont o vont da adenkorfañ - an douar - a vije ur bed kalet evito. Pa vijent deut da vezañ gwelloc'h, avat, e tistrofent d'o flanedenn a orin elec'h ma vijent resevet en-dro gant levez. An harluidi-se a zegasas darn eus o sevenadurezh war an Douar. Ar Yuzevien a oa an darn vrasañ anezho o tont eus ar blanedenn-se. Holl ebestel Jezuz a ouie evel just e ranke an dud adenkorfañ pell amzer ken evit dasprenañ an droug graet ganto en amzer dremenet, ken dre ma'z int c'hoazh anevaled, a blij dezho ar vuhez er c'hig, ha dre m'o deus ar speredoù kalz traoù da zeskiñ war vedoù danvezel. Pa'z eo paeet ganto o holl zleoù ha pa n'int ken dedennet gant ar vuhez er c'hig, en em zieubont eus rod an adenkorfadur hag e kendalc'hont gant o emdroadur en ec'honder. Seul uhel e pignont, seul evurusoc'h ez int rak seul dostoc'h emaint ouzh Doue.

Jezuz a gomzas dezho c'hoazh eus stad an denelezh war an douar, a oa warlerc'hiet awalc'h e kenver planedennoù all a zo. An douar a zo ur blanedenn yaouank. E skoaz ar speredoù savet bras ez omp ni bugale c'hoazh. C'hoant bras ar speredoù dienkorfet a vev en ec'honder oc'h en em stlejañ war c'horre an douar, pe izelloc'h, a zo distreñ en ur c'horf. Niver ar speredoù-se a zo brasoc'h eget re a vev en ur c'horf, neuze, araok bezañ adganet war an douar e rankont gortoz o zro. Lod a zo ken skuizh o c'hortoz, ma tostaont ouzh tud' zo da glask kaout an tañva eus ar pezh a ra ar re-mañ. Ma plij dezho aezenn ar gwin ardant e tostaont ouzh tud a ev, o vroudñ anezho da evañ muioc'h, pe e tostaont ouzh tud ne evont ket hogen a zo gwan o youl hag a evo pa vo lakaet ar menoz-se dezho en o fenn. An neb en deus ur pleg fall bennak a zo sur da vezañ heuliet gant speredoù o deus an hevelep tech. Souezhus an niver a speredoù dienkorfet a en em lak e gweleoù an dud e-pad an noz, o klask tañva e doare pe zoare plijadurezhioù ar c'hig. Kalz a hunvreoù hudur o deus aze o abeg. Jezuz, Mezeg bras ar spered, ne c'helle ket chom hep komz eus ar remed evit seurt darempredoù: ar bedenn. Jezuz a zeskas d'e ziskibien pediñ hag a ziskouezas dezho nerzh ar bedenn. Met ar bedenn hec'h unan n'eo ket awalc'h. Mar domp gwan a youl n'eo ket en ur bediñ hepken ez ay ar speredoù warlerc'hiet a zivar hon tro hag e viamp douget ganto d'ober kement pec'hed vil a zo, met pa ouzomp e tiwan an darn vrasañ eus hor sonjezoù fall eus speredoù all, hon eus ar remed-mañ: troc'hañ krenn ar sonjezon, da lavarout eo, chom hep he magañ, rak ma ne roomp ket a vagadur dezhi e varvo. Ar spered dienkorfet o welout ec'h enebomp outan a zeuy da skuizhañ hag a glasko ur preiz all. Tud'zo, avat, a zo ken distter o youl, ha ne ouezont ket an traoù-se, a zo preizet gant seurt speredoù izel. Jezuz a zeskas ivez d'e ziskibien penaos dieubiñ an dud pisouet gant speredoù an denvalijenn(2)

(1) Deut kant vloaz'zo bremañ, anavezet dindan an anv a "Speredegezh".

(2) En Aviel e kaver e-leizh a skouerioù eus speredoù vil kaset kuit gant Jezuz.

Estreget speredoù warlerc'hiet, fallakr ha vil a zo. Un tammig uheloc'h eget ar re-mañ ez eus reoù all, sklerijennet, hag a vag menozioù mat. Mar fell dimp o zedenniñ davedomp e rankomp d'hon tro magañ menozioù mat, hervez al lezenn:" ar re a zo heñvel, a gevret' vo kavet".

Diskleriañ a reas c'hoazh moarvat Jezuz d'e ziskibien petra eo buhez ar spered e-pad an noz. E-keit m'emañ hor c'horf o tiskuizhañ e kendalc'h ar spered gant e oberiantiz. En un den emdroet awalc'h e c'hell ar spered en em zamzieubiñ eus chadennoù ar c'hig ha kantren tro-war-dro hag, hervez e emdroadur, mont laek awalc'h en ec'honder ha zoken betek planedemoù all. En em vodañ a ra gant speredoù all heñvel outañ. Gweladenniñ a ra kerent dezhañ, bev pe "varv", en em welout a ra a-wechoù gant e vlenier speredel (1). Kaloneakaet ha kuzuliet e vez alies e-pad e gousk. Pa zihun ne zalc'h soñj nemet eus nebeut a draoù, alies ar pezh emañ o paouez gwelout (2).

Mar deo c'hwek ar c'houisk d'ar speredoù mat, direbech o c'houstonians, ne c'hoarvez ket kement all a-wechoù gant ar re o deus graet droug, dreist holl gant ar re o deus lazhet. Er bed astrel n'hon eus hent ebet d'en em zisober eus ar speredoù a fell dezho en em venjiñ warnomp m'hon eus graet droug dezho, rak ur spered bet graet droug dezhañ gant unan all a zo atav trec'h, war al leurenn speredel, war ar spered kablus. Ma c'hoarvez ganimp eta, bremañ, kousket fall evit un droug graet d'un all, e c'hellomp emskeudenniñ penaos e vo pa zienkorfimp, rak en tu all n'eus difenn ebet d'an hini kablus; aze e paeer noz-deiz ha ne c'heller klask repu en ur c'horf nemet dre an adenkorfadur.

Setu ar c'homzoù a vuhez peurbadus a glevant gant Jezuz: bevet o doa endev milionoù ha milionoù a vloavezhioù, hag ar vuhez-se n'he dije termen ebet. Pelec'h bennak all o dije klevet seurt komzoù? Hag, hervez promessa Jezuz Krist, ar pezh ne c'hellent ket kompren d'ar mare-se a vije desket diwezhatoc'h dezho, pa vijent emdroetoc'h.

Ar Speredegzh eo ar gelenn, e broioù ar c'hornog, a doata ar muiañ ouzh hini ar C'Hrist dre ma'z eo ivez ur gredenn a vuhez peur-

(1) Ael gwarezour, hervez relijionoù all.

(2) Kement-mañ a zo aes da zisplogañ dre ar pezh m'hon eus div vemor, ur vemor "astrel", dalc'het en hon tro-spered, hag ur vemor "gorfel", engravet en hon empoun. Ar vemor astrel a zo dispis awalc'h e-keit m'emaomp er c'horf (hervez emdroadur pep hini evel just); merzet e vez evelato dre ma talc'h an dud enebiezh pe garantez ouzh tud all eus an eil buhez d'eben, dre zardoud an "déjà vu", hag all. Ma n'eo ket spisoc'h eo ablamour ma n'eo ket gwall lugernus hon amzer dremenet ha ma tec'h hor spered rak soñj ar pezh a zo mezhus evidomp. Aliesoc'h e talc'homp soñj eus ar pezh a zo bet plijus. E tiez ar re foll e kaver e-leizh a dud hag a zo bet, emezo, impalaerien, roueed, duked, jeneraled, eskibien, hag all. Bez int bet ur penn uhel bennak e gwirionez, nemet an anv a gemeront a zo faziet alies. Dre lorc'h hepken eo e chomont da advevañ an traoù-se a zo bet ken plijus evito ha ne deu ket soñj dezho eus ar mare ma oant lakizien, pacted marchosi, soudarded eeun pe vreudeur lik, ez int bet ivez hep mar. An darvoudoù a vevomp e-pad hor c'houisk ne dremenont ket dre hon empenn, peogwir e vezont bevet, evit an darn vrasañ, e-keit m'emañ hor spered o kantren er-maez eus ar c'horf. Setu perak ec'h ankounac'haomp anezho peurliesañ. Un abeg all a zo c'hoazh: darvoudoù 'zo, a vevomp e-pad kousk hor c'horf, a vez graet dimp ankounac'haat gant hor vlenier speredel. N'eo ket rouez d'unan hunvreal, lakomp, gant tri pe bevar den, a gnavez holl en hunvre ha, pa zihun, gwelout ne anavez ken hemañ pe heñ-hont, ar pezh a ziskouez edo o tivizout gant un anaoudegezh eus ur vuhez all.

badus. Ablamour da se e weler kalz tud o tont eus ar relijionoù dog-
matek d'ar Speredegzh hogen diaes e vije gwelout ur spereder o tis-
treiñ d'ur relijion zogmatek. Er relijionoù-se ne gomzer ket a "vuhez"
peurbadus. Hervezo ez a ar re fall, goude bezañ tremenet d'ar muiañ
ur pevar-ugent vloaz bennak war an douar, d'an ifern, n'ousor ket mat
pe diouzhtu pe diwezhatoc'h, hogen en ifern, pe o c'hortoz mont e-
barzh, ne reont netra. Ar re vat int a ya d'ar baradoz, goude un amzer
diresis ivez, kollet en hevelep doare evit ar vuhez. Ar baradoz-se e-
un a zo ul lec'h divuhez ha goular. Buhez evel m'hon eus klevet
gant Jezuz Krist ne gaver ket enno. Dre ar pezh hon eus gwelet arsak,
ez omp bet krouet evit an oberiantiz. N'hellomp ket kontañ ar stum-
moù disheñvel hon eus kemeret arsak dont da vezañ ar pezh ez omp bre-
mañ. A vec'h ma tilezemp ur stumm, pe ur c'horf, e kemeremp unan all
nevez; ha da zeskiñ adarre, ha dalc'hmat ! Setu perak n'hellomp ket
heuliañ ar relijionoù a lak hor spered da vorediñ: evit petra studiañ
ma vezomp lakaet warc'hoazh pa varvimp, mar domp bet mat, e renk an
aeled ? o c'houzout pop tra ? An hini n'en deus ket gallet mont lar-
koc'h eget an daolenn gentañ pa oa er skol, pa dremenno en "tu all",
a vo lakaet desketoc'h eget Einstein. Er relijionoù-se e vez pedet,
e lavarot. Pedit a zo mat, hogen ouzhpenn pedit eo ret labourat,
studiañ ha klask rentañ servij d'an nesa. Pedit hepken ha gortoz ma
kouezho ar c'hras dimp eus an Neñv a gas, neket d'ar vuhez peurbadus,
hogen d'al leziregezh empennel peurbadus. Pelec'h e kavfemp-ni,
sperederien, estreget er Speredegzh, ul levenez par da honnezh a
zeu dimp eus ar feiz hon eus ez omp bet krouet gant Doue evit bezañ
evurus da viken, pa vimp bet kavet dellezek da resev ar pezh en deus
darbaret evidomp adalek an deiz kentañ? Ha peogwir ne c'hellan reiñ
gwelloc'h skouer eget ar pezh a santan ennoun, eus ar pezh a zañva-
omp pa gredomp er "vuhez peurbadus", setu ar pezh a zo c'hoarvezet
ganin warlene e miz Kerzu: e ti mignoned din elec'h ma gustuman mont
ur wech ar zizhun, e voe degaset eus Rio de Janeiro ur paotrig bihan
daou vloaz, pe war-dro, da zisammañ un tammig e vamm, a zo gant ur
c'hrouadur all pemp miz. N'oun ket endroet awalc'h c'hoazh da garout
bugale ar re all evel va re-me. Lod a gavan brav, lod divalav, met
ne ran van e gwirionez nemet eus ar re a zo kar tost din. Ma, ar
bugel-mañ a blijas din ar wech kentañ ma wellis anezhañ, un tammig
muic'h an eil gwech, muic'h c'hoazh an trede gwech, hag evel-se
betek an deiz ma'z eas kuit. Ma ne ran ket kalz a van ouzh bugale
ar re all, ar re-mañ a ra nebeutoc'h c'hoazh ouzhin, nemet hemañ,
paotrig Rio. An eil gwech ec'h anve ac'hanoun "vovô"(1). Evel ma'z
oun boaz bremañ da brederiañ, e klaskis abeg ar garantez-se etre
henezh ha me. Ar respont a zeuas raktal eus an ec'honder: "da vreur".
Doue ra vo benniget! Eo, henezh eo evel just, bremañ pa soñjan el
luskeudenn am eus gwelet dioutañ er gêr gwechall, an hini a zo bet
va breur hemañ, hag a "varvas" pa ne oan c'hoazh nemet pevar pe bemp
bloaz. Nebeud da c'houde m'en em gavas ar paotr e ti an dud-se ne'z
aen di nemet evitañ, ha bremañ ne'z an di nemet da adwelout al lec'h
ma c'hoarien gantañ, ha da adlavarout gant tud an ti ar c'homzoù
fentus a zistage "va breur" gant e vouezhig ken flour: "vovô !
Vamos sentar na pedra!" (2). M'am eus kavet temn an disparti, e teu
koulzkoude frealz din, da gentañ dre ma c'hellin mont da Rio d'e
welout p'en em gavo va chan labour, ha da c'houde dre m'en deus ye-
c'hed ar wech-mañ, ar pezh n'en deus bet morse pa oa va breur hervez
an dud. Ar c'hleñved a lakaas anezhañ da zienkorfañ ken yaouank a
zo unan spontus, ha bez e tle bezañ paset ul lod vras eus e zleoù, ar
pezh a lak ac'hanoun da grediñ e vo un tamm mat evurusoc'h bremañ.
Nag ul levenez eo o gwirionez soñjal er paotrig bihan-se, klanv ur
47 vloaz'zo, ma yae e dad war droad (ret e oa mont war droad, muic'h
e tellezed) eus Sant Alar Kerne da Blougastell gant e gresioù, da
glask feunteun St-langiz, etre ar C'hab hag an Treiz, he c'houllon-

(1) Tad-kozhig

(2) Tad-kozhig! Domp da azezañ war ar maen! (Plijout a rae dezhañ
mont da azezañ ganin war ur maen, direk an ti, da sellout ouzh an
dremenidi hag ar c'hirri).

an daou benn eus ar gordenn a vo dalc'het gant daou zen azezet adreñv, unan e pep tu, rak bremaik e vo lazhet ar gouloù ha tud'zo a c'hellfe krediñ e vo graet an darvoudoù gant ar re a zo azezet tost d'an hanterour. Ur metrad hanter pe zaou vetrad a zo etre ar c'harilh hag ar renkennad gentañ a gadorioù. Un ezel eus ar c'helo'h a zo azezet e goueled ar sal evit lazhañ ar gouloù. Lazhet eo ar gouloù hag an Dr. J. a zigor al labourioù dre ar bedenn "Hon Tad". Souden e klevet un taol sut hag an dud er sal a respont "boa noite" (noz vat). Displegañ a ra an Dr. J.: an hini en deus laosket an taol sut (evel un taol bombard), eo Irubi, un Indian dienkorfet; e zoare dezhañ d'hor saludiñ eo, da ziskouez dimp ez omp deut mat, evel ma rae p'edo o vevañ war an douar pa wele ur mignon o tont d'e weladenniñ d'ar gêr. Irubi n'en em ziskouez morse, na ne lavar ger ebet morse. Kenderc'hel a reer gant ar pedennoù, hag an hanterour a lak ur bladenn da dreñv: un "Ave Maria". Dizale e weler evel ur c'houlouenn c'hlas er sal: skleur astrel breur Pétrio Zeferino. Emañ ar skleur-se a-us d'hor pennoù ha mont a ra eus an eil tu d'egile. Zeferino a oa ur soudard roman a veve war-dro ar bloaz 300 g.K. Degemer a reas ar vadeziant ha dre ma nac'has treiñ kein d'ar feiz kristen e voe merzeriet. N'eo ket distroet war an douar abaoe. Liv glas skleur astrel Zeferino a ziskouez ned eo ket ur spered gwall uhel. Ur spered uhel en deus ur skleur gwenn, skedus. M'en em ziskouezfe ur spered uhel-tre er sal en e skleur astrel e c'hellfemp chom dall. Enaouiñ a ra breman ul lamp ruz dirak ar stign. Breur Zeferino eo a zo o reizhañ nerzh al lamp. Erru eo mare fromus an abadenn: en em ziskouez a ra breur Zeferino; enaouiñ ha mervel a ra ar gouloù hep ehanañ hag e-keit m'emañ war enaou e weler Zeferino o tont eus ar "gaoued", hag o rein bleunioù da dud ar renk kentañ. Gwisket eo gant ur vantell wenn, a c'helo e benn. Gwelout a reer mat e zremm; barv rouz en deus. Mousc'hoarzhin a ra hogen ne lavar ger ebet; un eizh gwech bennak e weler anezhañ o tont eus ar "gaoued" hag o kinnig bleunioù d'an dud. Ne glever trouz ebet. Pa ya Zeferino e kuit e klevet daou daolig evel skeiñ pennoù ar bizied war foñs ur vojest houarn gwenn c'houllo. Evel-se eo e lavar kenavo dimp. Kenderc'hel a ra ar pedennoù; "Hon Tad" ha "Pedenn Caritas" a bep eil (ar pedennoù a vez distaget goustad ha fraezh); ur wech an amzer e klevet an "Ave Maria" ha sonerezh all a zere ouzh an aergelc'h relijiel a ren er sal. An dud a chom sioul (en despet d'an domnder vras!). Warlerc'h breur Zeferino e teu ur "preto velho" (morian kozh) (1). Hemañ n'en em ziskouez ket, met komz a ra. Iskis eo klevout ar "vouezh" o komz; kreñv awalc'h eo met dont a ra betek ennomp evel drailhet, pe evel ma chanfe ar spered etre ar gerioù.

(da genderc'hel)

(1) Pa gomzer eus "Preto Velho" e Brasil e soñjer diouzhtu e amzer ar sklavelezh. Ar vorianed degaset evel sklaved da Vrasil eus Afrika o doa o relijion. Eus ar relijion-se, kemmesket gant ar Katolikiezh, e voe ganet ur relijion all anvet "Umbanda" (dist. "Cumbanda"), hag a ra berzh bremañ, dreist-holl e-touez ar re zu hag ar re wenn dizesk. En un abadenn Umbanda e vez devet ezans da gentañ, ensouet e vez gouleier war un aoter leun a imajoù, ha kanañ e reer kalz; an hanterourien dirak an aoter a vez "kemeret" gant ar speredoù kerkent ha ma vez staget da ganañ. "Diskenn" a ra Indianed ha morianed kozh (ha re wenn ivez moarvat). Pa ziskenn ar "vorianed kozh" ez a an dud da c'houlenn kuzul diganto, evit bep seurt traoù: yec'hed, aferioù, euredoù h.a. Me gred o deus fizians enno dre m'o deus gouzanvet kement pa oant sklaved, hag ar sklaved-se, daoust ma oa du o c'hroc'hen, a c'helle kaout un ene gwenn. Kaerat tra da glevout eo kanañ an Umbanda!

TREDE DISKULIADUR

Rua Matias Aires, 193 (Consolação)

São Paulo, Brasil